

oremañ

Kleñved ar
vuoc'h foll



Karla
Kuzul Europa

Lizhiri

Kevnroidi kaezh,
Labour e Breizh 'maon o klask hogen
ur gourc'hwel amzer klok, gant implij ar
brezhoneg a vremañ. Ne vern peseurt
rann labour, gant ma ne vo ket re
anzereat ar gopr!

Ur gourc'hwel en ul leti e-kreiz Pariz 'm
eus, n'eo ket displejuz met em bleud on
e Breizh ha gant ma c'hellan kaozeal e
brezhoneg. Trugarez en a-raok d'an
neb zo dudiet gant ma enstriverezh pe
an hini am skoazello.

Aotrou Paskal Herri Trichet 19,bis rue
Eugène Carrière 75018 Paris Bro-
C'hall. Pellgomz : 16.1. 43.79.85.81.

Annaig ar Gwiban, Ronan Blanc,
Kaourintin, Olwen ha Riwanon a zo
laouen o kemenn deoc'h ez eo
ganet d'an 20 a viz Gwengolo
1992

YOUEN

e Roazhon.

Michèle Chaignon ha Noel Laine
a zo stad enno o kas deoc'h ar
c'heloù eo kresket an dud
en o zig gant ganeidigezh

MEVEN

e Sant-Briag d'an 3 a viz Here
1992. Plijet eo e vreur, Kevin, evel-
just.

Labourat e embregerezh Diwan

Bloavezh-skol 1992/93

Emañ DIWAN o klask danvez-
skolaerien da gemer perzh er
stummadur kroget e miz Here.

Evit-se ez eo ret kaout an DEUG pe un
diplom all a dalvez kemend-all, hag ul
live brezhoneg deoret, eveljust, daoust
ma vez pourchaset ur stummadur gant
Diwan war ar yezh.

Klask a ra Diwan ivez skolaerien gant
ul live brezhonek deoret e-giz
eillec'hier, hag ur sekretourez
maketennourez divyezhek, barrek-tre
war "PAO" evit ur post lec'hiet war-dro
Brest.

Evit an holl ginnigoù, kas CV hag ul
lizher en em ginnig e brezhoneg da
z/DIWAN B.P.22 29870 Lanniliz,
Pellgomz 98 04 05 42. Renner an
implijidi : Jean-Paul Coustellier.

bremañ 134 - miz Du 1992

Breizh trec'h d'ar jakobinelezh ?

Kompren a ran a-walc'h e vefe lennet
disoc'h an dilennadeg-referendom evel
un trec'h gant T.L., en doa kensinet,
gant lod eus ar Fe C'hlas a Vreizh, ur
Galv da votiñ YA. Kompren a ran ivez e
lakfe ar ger "trec'h" e titl e bennad e-
barzh Bremañ diwezhañ eta.

Met ne gomprenan ket e welfe aze
"Breizh trec'h d'ar jakobinelezh".
Daoust ha trec'h'et eo bet ar
jakobined ? Daoust ha n'emañ ket ken
Miossec (RPR, eus tu an NANN) e
penn kuzul Penn ar Bed ? Daoust hag
adunanet eo Breizh, daoust ha votet e
vez lezennoù gant Breujoù Breizh,
daoust ha laket eo bet ganto ar
brezhoneg da yezh ofisiel ?

Ul lenn all a c'heller ober d'an disoc'h :
sentet o deus ar Vretoned ouz pennoù
ar gouarnamant, ha graet o deus
adare evel ma kened dezho ober. Ha
trec'h eo bet jakobined ar gouarnamant
war o eneberien a drugarez da
vouezhioù ar Vretoned. Hag ar
Vretoned-se a voto al lod muiañ
anezhe evit kannaded eus strolladoù
jakobin a-benn da vloaz adarre. Pelec'h
e c'heller gwelout un trec'h eta ?

Un draig all c'hoazh : kredif a raen e
oa neptu ar gelaouenn Bremañ er
votadeg-se. Hag e oa bet a-walc'h
(Pennadoù evit ar YA, evit ar boikot,
hogen netra evit an NANN a-raok an
dilennadeg). Titl pennad T.L. war golo
an niverenn diwezhañ, "Breizh trec'h
d'ar jakobinelezh", pa ne oa bet
savpoent ofisiel ebet gant ar
gelaouenn, a-raok ar votadeg da
vihanaf, am eus kavet ur blaz iskis
gantañ. Petra a soñj ar genlabourerien
hag al lennerien n'o deus ket votet
YA ?

Mark Kerrain (Roazhon)

Evit ar pezh a sell ouz ar votadeg
ziwezhañ ne oa ha n'eus savboent
ofisiel ebet gant Bremañ. A-raok ar
votadeg e oamp e soñj da embann ur
pennad a-du gant an Nann ivez. Ne oa
ket en em gavet e koulz ganeomp. A-
bouez e oa ivez ober anv eus disoc'h
ar votadeg e Bremañ, d'hor soñj. Hor
c'henskrivariere a oa a-du gant an Nann
pe ar boikot zo chomet hep skrivañ ...
Pennad T.L., mard eo anat war be du
ez a, a ginnig ivez sifroù hag elfannoù,
talvoudus d'an holl, a gav daomp.

Skipailh ren Bremañ

Labour kinniget gant Dastum Kreiz-Breizh

Emaomp o klask un implijad (pe un
implijadeg) evit kas da benn al
labourioù boulc'h'et gant Dastum e
departamant Penn-ar-bed hag e Kreiz-
Breizh.

Ar stal-labour a vo fiziet en implijad-se
eo hini Dastum Kreiz-Breizh e Karaez.
Bez' e vo e karg an den-se :

- ober war-dro ar stal, an diehoù a zo
enni, ar stajidi a zeulo da reiñ skoazell
dezhañ, hag an dud a zeulo d'ober
enklaskoù ;
- soursial ouz an darempredoù etre
Dastum, Dastum Kreiz-Breizh, ar
c'hevredigezhioù pe an dud o labourat
ganeomp war ar sevenadur pobl, hag
an dud e karg (kuzulioù-kêr, kuzulioù-
meur, kuzul-rannvro) ;
- bezañ gouest da doullañ kaoz e
brezhoneg gant an dud a-ziwar ar
maez evit kas da benn dastumadoù
gant ar magnetofon pe gant ar
chamera.

An dud a garfe en em ginnig evit al
labour-se a vo ret dezho skrivañ da :

Dastum Kreiz Breizh
2 straed Jobbé Duval
29270 Karaez.

Selaouiñ ha selaouiñ mat, hag e klevet Brezhoneg



bemdez war Radio Kreiz Breizh
102.9 mHz

bep merc'her war Radio an Arvorif
103.1 mHz (7e30/9e30 noz)


bemdez war Radio Bro Wened
101.7 mHz (10e30/12e30)

bemdez war Radio Breizh Izel
war-dro 93 mHz (7e15 mintin,
1e30 abardaez, 7e30 noz)

Karta Kuzul Europa

Ha sinet e vo Karta yezhoù bihanniver Kuzul Europa gant ar C'hallaoued ?

que faire
de leur
lang... ?



Jack LANG, ministr an Deskadurezh hag ar Sevenadur

Ar C'hallaoued, int, o doa roet
meur a abeg da sevel a-enep an
danvez-Karta kinniget da Stadoù
Kuzul Europa : meur a hini eus
melladoù ar Garta Europat a vez doujet
outo end-eeun gant ar Stad C'hall
amez (evit an deskadurezh, da
skouer). Lod all a vije kontrol d'ar
Vreizezh c'hall zo diazezet war
"gevatalded ar geodediz dirak al
lezennoù" (buhez foran, lezioù-barn,
h.a.). Abeg ebet evito eta da vont a-du
gant ur Garta o vareziñ gwirioù yezh
ar bihanniveroù.

Hirik eo skrid ar Garta-se, meur a
lodenn ennañ. El lodennoù I ha II e
tislpeger he falioù : sevel ur benvag da
vareziñ yezhoù bihanniveroù Europa.
Al lodenn III a gaver enni ur bern
melladoù disheñvel evit kas war-raok
implij ar yezhoù-se er vuhez foran : en
deskadurezh, el lezioù-barn, er

melestradurezhioù, er c'hleweled, er
vuhez armerzhel ha kevredigezhel. Evit
pep yezh komzet war he ziriad he do
pep Stad da zoujañ ouz 35 mellad pe
ismellad bet dibabet ganti. Dre m'eo
disheñvel-tre stad (ha dezvad) an holl
yezhoù-se eo e vo graet evel-henn -
reiñ da zibab un toullad krafoù etre an
holl re zo laketaet er skrid-eglev. Ar
pevare hag ar pempvet lodenn a bled
gant seveniñ ar melladoù kent ha mont
en-dro ar Garta.

Abaoe bloavezhioù emeur o prilitiñ ar skrid-se e Kuzul Europa

War-lerc'h bezañ savet gant
arbenngourien e tremenas an dastum
dirak Bodadeg Dileundi ar Parlamant
Broadel a-raok bezañ degemeret d'an

E miz Mezheven e oa bet
degemeret ar Garta gant
an darn vrasañ (22 diwar
27) eus dileuridi ar Stadoù
zo bodet e Kuzul Europa.
Ar Stad C'hall, hi, a oa
chomet hep votiñ, evel
m'o doa graet ivez Breizh-
Veur, Turki ha Kiprenez,
ha votet e oa bet a-enep
gant Bro-C'hres. Bremañ
avat eo deuet ar mara da
bep Stad ezel da sinañ ar
Garta-se pe da chom hep
ober.

22 a viz Mezheven gant Poellgor ar
Vinistred (gant 22 vouezh diwar 27).
Bremañ eo dieub pep Stad da zegemer
ar Garta - pe da chom hep ober. Adal
ar 5 a viz Du 1992 e c'hall bezañ sinet
gant. Hervez doare e vo meur a Stad
o sinañ adal an devezh kentañ.
Talvoudigezh he do ar Garta 3 miz
goude an devezh ma vo bet sinet gant
5 Stad d'an nebeutañ, adal an 3 a viz
C'hwevrer marteze eta... Evit ar wech
kentañ e vo ur benvag lezennel da
vareziñ yezhoù ar pobloù hep Stad en
Europa. Ur mell kammad war-raok a vo
graet. Ma talc'h ar gouarnamant gall
gant an emzalc'h zo bet e hini betek-
henn e nac'ho sinañ moarvat. Setu
m'eo krog Yves Dollo, kannad P.S.
"Aodou-an-Arvor", da zivorfillañ un
tamm. Bez' e mañ, a-gevrat gant
deputeed all, o paouez krouiñ ur bodad
"etre-kostezenn" er parlamant gall a
c'houlenn digant ar gouarnamant lakat
votiñ ul lezenn "evit ar yezhoù hag ar
sevenadurioù rannvroel".
Ha pa ne vefe ket degemeret Karta
Kuzul Europa gant ar C'hallaoued
bremañ, ne vo ket echu ganti. Hag un
devezh bannak e rankint plegañ, ha
degemer anezhi ■

I.K.

bremañ 134 - miz Du 1992

Ekonomiezh

Tailhoù rannvro

Kresket e 1993

D'ar 16 a viz Du e vo divizet budjed rannvro Breizh (4 departamant) evit 1993. Chañsoù 'zo e vefe ur c'hresk bras war tailhoù ar rannvro evit ar bloaz a zeu, dre ma vank 200 milion a lurioù evit klozañ ur budjed a 2,5 miliard a lurioù.

Daoust da Vreizh bezañ ar rannvro gant an nebeutañ a dailhoù er Stad c'hall, e vo ret dezhi kreskiñ an tailhoù betek 30% marteze an tailhoù, a-benn seveniñ he raktesoù, a ya war-gresk ingal, pa chom digemm an doareoù-pasañ anezho.

Ar modernaat skolioù ha liseoù, hep skoazell ar Stad ar bloaz-mañ, an hentoù, ar c'houst anezho o kreskiñ eus 50%, ar glanaat dour, an nevesaat hentoù-houarn, hag ar sevel uzinoù lastez hag ar c'havout labour d'al labourerien-douar, setu kargoù ar rannvro. Tout an traoù-se paeet gant tailhoù dieeun, war an aotre-bleniañ, ha tailhoù eñeun war an tiez : tailhoù lec'hel, war al labourioù hag an douaroù. War skeul an tailhoù eñeun e vez kavet Breizh 4 departamant en 19vet rank ■

Hegareg

Kreiz Breizh dilabour


Echu eo gant CELTAVEL, un embregerezh staliet e Kreiz Breizh e Lennon, e-tal ar C'hastell-Nevez.

50 post kollet

Pa ouzer pegen trout eo ar peuriñ war tachenn al labour e komprener pegen fall eo an taol evit Kreiz Breizh ur wezh ouzhpenn

Emgann kreiz Breizh en deus savet e vouezh (gant un trakt skignet e kreiz-Breizh "Silence on liquide") hag a damall laoskentezh an dud e karg an afer-se.

Gw.C.



bremañ 134 - miz Du 1992

Enkadenn al lur saoz

Harz-labour e ti Doux



Un dra ral : harz-labour zo bet graet gant implijidi Doux Kastellin

Lakaet eo bet d'ias Doux, embregerezh kentañ evit ar c'hig-yar en Europa, hag a implij 6500 den, gant enkadenn al lur saoz, dre m'eo diazezet dreist-holl e werzhioù war an ermaeziañ yer er broioù estrañjour : 90 000 penn-yar nebeutoc'h a vez produet gantañ bremañ, ha setu m'eo adframmet skipailhoù labour uzin Serent ha Kastellin, a-benn produiñ 12% nebeutoc'h a gig.

N'eus ket bet klevet komz eus skarzhañ tud c'hoazh, kevratoù berrbad 'zo ne vint ket kadarnaet hepken. Harz-labour zo bet memestra gant implijidi Kastellin, e-pad peder eurvezh hepken. Re verr da rouestlañ lañs al labouradeg evel just, hogen merzet eo bet an darvoud, nevez a-walc'h en un embregerezh disindikad hag en ur vro dilabour ■

Hegareg

Trede Bed ha Breizh

Kafe Max Havelaar

Un oberenn o plediñ gant diorroadur, trevoniezh, keo-dedelezh etrevroadel ha buhez lec'hel.



4


EBreizh eo bet kroget e miz Here da skignañ pakadoù kafe "leal", paeet ma 'z eo d'ar broduerien en tu-all da brizioù bedel ar c'hafe (war-dro 30% ouzhpenn). A-drugarez da liammoù eunoc'h kenseurterezhioù produerien ha loskerien-gwerzherien kafe.

N'eo ket e-touez stourmerien hepken eo da vezañ gwerzhet ar c'hafe-mañ, ma vefe kavet e gwerzh er stalioù bras eo pal ar gevredigezh "Pobloù kengred". Soñjal a ra dezhi e ve tud kontent da bremañ kafe, hag eñ un tammig keroc'h zoken, gant ma vevo planterien kafe un tammig gwelloc'h diwarnañ. Pa vo paeet gwelloc'h kouerien diwar ar c'hafe, e tennint nebeutoc'h a c'hounit diwar ar c'hoka hag ar rozenn-voc'h. Heroin ha kokain a zeu alies-tre eus an hevelep tachennoù hag ar c'hafe.

Titour all : C. Debrouse, Pobloù kengred, 5 str Bizette, 35000 Roazhon. Pel. 99 38 82 40

Politikerezh

Harzet adarre



Veronique Thomas Hunault e Brest

D'ar Yaou 1añ a viz Here eo bet kaset Veronique Thomas Hunault en-dro da Bariz, dirak ar varnerez Levart. Karc'haret eo dibae e toull-bac'h Fresnes. N'he doa ket doujet d'ar gontrollerezh barnerezhel, da lavaret eo e oa bet e darempred gant tamallidi all.

Tra m'eo justis ar Stad C'hall o paeuz bezañ adframmet, n'eus ket tu d'an damallidi prientiñ o difenn, gourdrouzet ma 'z int noz-deiz da vezañ bac'het. Daoust hag e hañvalfe d'ar stad c'hall, bet karezet meur a wech c'hoazh gant an aozadurioù etrebroadel, a-fed gwirioù mab-den, bezañ lakaet en arvar gant ur vamm tri bugel ganti, betek bac'hañ anezhi ?


Stephen KING tamallet

Bet tapet d'ar Yaou 23 a viz Here e Pont-Skor, tamallet ez eus da Stephen King strollañ torfedourien ha sponterien. Sikour en dije roet da izili ETA. Lezet eo bet da vont dieub. Harzet e oa bet c'hoazh e 1982, da vare taol-bruderezh ar GIGN, aozet ganto ar pezh-c'hoari brudet dindan an anv "aler Iwerzhoniz Vincennes".

V. Thomas Hunault, M.A.F.,
829054 W Cellule 152, Allée des
Thuyas, 94261 Fresnes Cedex

Stourm ar Brezhoneg

Duañ adarre



5

Kontrol d'ar pezh a oa bet prometet deomp gant Kuzul Meur Penn-ar-Bed ez eus bet digoret un troc'had hent nevez en departamant hep an disterañ panell heñc'hañ vrezhonek.

Se zo kaoz o deus ranket tud Stourm Ar Brezhoneg Goueled Leon adkregiñ er podadoù liv d'an 23 a viz Here 92 ha mont da vastarañ panelloù nevez an hent-tro zo bet digoret er miz-mañ e Reter Gouenou (hent Plabenneg-Brest).

A-du emañ ar Vretoned gant ar panelloù brezhonek, eme ar sontadurioù. Perak gortoz ha termal enta evit kas da benn ar promesaoù a oa bet graet deomp e vije lakaet panelloù brezhonek war pap hent departamant nevez e Penn-ar-Bed ? Ar pezh zo bet tu da ober ar Vro Vigoudenn a zle bezañ graet e Bro-Leon ivez.

Lavaret en deus Stourm Ar Brezhoneg meur a wech e chome war evezh ha ne grade nemet ar pezh a wele. Mar bez ret deomp adkregiñ da livañ panelloù evit ma vo doujet h'hor gwirioù e raimp c'hoazh.

Stourm Ar Brezhoneg Goueled Leon
23/10/92

bremañ 134 - miz Du 1992

Amnistia Etrebroadel

Ur gevredigezh hervez lezenn 1901 eo Amnistia Etrebroadel. Krouet e oa bet e 1961 gant un alvokad saoz, Peter Benenson e anv. Distag eo Amnistia Etrebroadel diouzh levezon pep Stad ha diouzh pep strollad politikel.

Setu tri fal pennañ Amnistia Etrebroadel :

1. Distakiañ an holl brizonidi a goustiañs dre ar bed a-bezh, da lavaret eo kement hini a zo bet bac'het en abeg d'e venozioù, d'e gredennoù relijiel, d'e ouenn pe d'e reizh.
 2. Soutenel e vez gant Amnistia Etrebroadel kement prizoniad(ez) a-goustiañs gant ma n'en deus na kaset da benn un taol a-feulster e-unan na broudet re all d'ober kement-se.
 3. Goulenn groñs ur prosez reizh ha dindan ber amzer evit an holl brizonidi bolitikel.
- Sevel a-enep d'ar jahinerzh ha da gastiz ar marv e pep degouezh.
- E Breizh ez eus ur gevrenn eus Amnistia Etrebroadel e pep kâr vras, gant pep prizoniad a-goustiañs pe den aet diwar-wel get pe bet lazhet e karg.
- E Kevrenn an Aberioù ez eus bet fiziet ennomp studial d'oser un den, Eduardo Zapata e anv, aet diwar-wel e Kolombia.

Istor Eduardo Zapata

D'ar 14 a viz Ebrel 1990 e Puerto Bello, Kolombia, e oa bet dastumet daou-ugent kouer gant ur vandennad tud armet, Eduardo Zapata en o zouez.

Gwelet eo bet ar c'hampionad prizonidi e-barzh un dachennad soudardel gant meur a dest, ha gouzout a ouzer edo ar skraperien izili eus ur strollad armet o labourer evit un "terratiente" (perc'henn labourer) anavezet mat dre ar vro. D'an 11 a viz Ebrel 1990 e oa bet kavet 24 c'horf-marv bet douaret war dachennad an hevelep "terratiente" : diskouez a rejont bezañ bet jahinet ha tennet warne gant boledoù. Da belech e oa aet ar 26 den all bet paket tri miz en diagent, Eduardo Zapata en o zouez ? Ne hañval ket an ensavadurioù foran c'hoantaat labourer kalet a-benn diroestlañ an degouezh truezus-se, ha n'int ket bet re domm evit barn ar soudarded a oa diskred warne en afer.

Skrivit - Pellgomzit

Amnistia Etrebroadel Kevrenn 438 an Aberioù ti Isabel Kerdudo Ar Bourk 29870 Koz-Meal ☎ : 98.84.59.09.

Priz Nobel ar Peoc'h da Rigoberta MENCHU




Roet eo bet Priz Nobel ar Peoc'h 1992 da Rigoberta Menchu Tum, indianedez Maya-Kwiche eus Gwatemala. 33 bloaz eo ha deuet eo da vezañ un arouez eus poanioù ha stourmoù he fobl. Drouklazhet e oa bet he zud hag he breur gant polis ar Stad. "Embann a ra ar vro-mañ bevañ en demokratiezh, met dianavet e vez an Indezidi, hag int an darn vrasañ eus ar boblañs, ken n'eus ket a reizhder evite". a zisklerias Rigoberta Menchu

nebeut a-raok gouzout e oa bet roet ar priz dezhi, da José Elias evit El País. Lavaret a reas ivez ne dalvaze ket ar peoc'h sinadur ur tamm paper hepken. Muioch a reizhder sokial, a zoujañs d'al lezenn ha da wirioù Mab-Den a oa ezhomm a-raok sinañ ur peoc'h a lakate un termen da 32 vloaz Guerrilla. E Douarnenez e oa bet R. Menchu e 1984 da gefiver Gouel ar Sinema ■

Gw. E.

**30 000 menngleuzier dilabour
Dazont glaou Breizh-Veur**



War nes koll o labour emañ 30 000 menngleuzier-glaou Breizh-Veur. Setu ar pezh a zo bet kamennet gant renerzh British Coal. Hervez sindikadoù ar vengleuzierien, ne vo morse kavet ul labour en-dro gant ar re skarzhed, ha 60 000 den ouzhpenn a gollo o implij war an dro, dre ma labouront a-gevret gant an embregerezh-glaou.

Ezhommoù energiezh Breizh-Veur a zo sañset kreskiñ eus 15% ac'hann d'ar bloavezh 2000 : perak serrñ menngleuzioù glaou, a zo bet diazezet warno pinvidigezh industrie ar vro abaoe 200 vloaz neuze ? Gwelloc'h eo gant an embregerezhioù prevez an tredan bet produet diwar gaz, a-hervez. Gaz mor Breizh, evel just, a-walc'h gantañ da badout betek ar bloavezh 2000 ! Ret e vo adlansañ menngleuzioù glaou da neuze, eme an Ao. Littlechild, enklasker war ar an energiezh : koustus-kenañ e vo, ha keuz o devo ar Saoz d'ar mare-se da vezañ serrat o menngleuzioù d'ar mare-se, emezañ.

Ouzhpenn 700 000 menngleuzier a veve diwar ar glaou e 1947, 20 000 a vint e nevez-amzer 1993 ma teu a-benn British Coal gant he folitikezh-skarzhañ. Ma teu a-benn, daoust d'an harzoù-labour ha d'ar manifestadegoù divant er vro a-bezh, e-giz hini ar Sul 25 a viz Here, e Londrez, 150 000 den enni, o vodañ menngleuzierien deuet eus kement pùs a zo, kement hag implijidi an ospitalioù, klañvdourazed, micherourien an tisevel, dre m'emañ ar skarzhad implijidi diouzh ar c'hiz er Rouantelezh Unanet ■

Brezel ha goañv

Ur milion a vugale en tu-mañ da zaouzek vloaz a zo lakaet en arvar da vervel e Yougoslavia kent, gant "un enebour kriz ha sioul, ar goañv, hir ha yen-skilas ma c'hell bezañ er broioù-se", eme James GRANT, rener UNICEF (kañ ar Broadoù Unanet evit sikour ar vugale).



Ur gevredigezh sikour, KEMPOUEZ hec'h anv, he deus lakaet ur mil bugel bosniat da zont da Vro-C'hall gant o mamm, eus miz Du '92 da viz Even '93. Kantadoù a familhoù o deus roet o anv da zegemer ar vugale. Hogen, petra vo graet gant ar vugale ac'hann da c'hwec'h miz (6 miz repu zo aotreet namaiken) ? Kaset d'o bro en-dro, echu ar brezel pe get ■

Kempouez/Equilibre, 14bis bd Artillerie, BP 7124, 69348 Lyon Sedeks 07, Bro-C'hall

**Trede bed
Sklaved e Bangla-Desh**

Er bad a-vremañ e prener hag e werzher sklaved c'hoazh. Dizoloet ez eus gant polis Bangla-Desh 70 den, padred ha merc'hed, staget e strad ur vag. Bez' e oa ar merc'hed da vezañ gwerzhet 2500 lur pep hini da fouzhechioù eus Indez pe Bakistan. Ar baotred yaouank, int, a oa da vezañ prenet gant tud eus emirelezhioù Pleg-Mor Arabia da vont da jokeed er redadegoù kañvalad du-hont. Hervez polis Bangla-Desh e ya 15 000 den da sklaved er vro-se bep bloaz ■

dre Europa o lenn "The European"



Alamagn

Trafikerion danvez-tarzh

En Alamagn en deus ar polis torret ur c'helc'hiad trafikerion metaloù skinoberiant, dizoloet dre ma oa bet arouelel unan eus an drafikerion en ur c'hiafidi e Suis kontammet ma oa bet gant ar metaloù o-unan. Kavet ez eus 200g Kaeziom-137, an danvez kontamusañ er bed eme lod, strontiom-90 hag uraniam.

Emaint o klask 20kg uraniam-235 c'hoazh. Aozet e oa an trafikerezh gant Poloniz hag Alamaned o tennañ gounid eus diskar an urzh komunour er Reter hag eus ar prest ma vez tud zo eno da rastellat arc'hant buan. "Lein ar skomgrec'henn" na ve ken, ha pa ouzer pegen ankeniet e vez levierion zo da bouchas armoù derc'hanel d'o riez e sav ur gridenn en den.

Komunour atav

Levier kozh Reteralamagn, Erich Honecker, en deus emezelet e KPD, strollad komunour nevez Alamagn, hag eñ en toull-bach. Degemeret eo bet e emezeladur dre ma'z "eo un den a zo chomet feal d'e gredennoù komunour a-hed e vuhez", eme unan eus atebierion ar strollad bihan-se ■

Spagn

Goude ar gouel bras

Dekmiladoù a dud zo dilabour a nevez e Sevilla war-lerc'h an Diskouezadeg Holvedel, a zo serret he dorioù gant 25 000 a dud a veze gopret gant an Diskouezadeg, hag 11 000 gouchwel all a yae en-dro diwar an degouez-se. Gant an 20 000 den bet skarzhet c'hoazh ne ra ket vad d'ar vuhez er c'hom-bro-hont, m'emañ ar feur dic'hwel en tu-hont da 20%.

Lez-varn

34 den, kouerion, marc'hadorion danvezioù kimiezhel ha kargidi, zo dirak al lez-varn e Sevilla evit bout barnet a-zivout lazhadeg un 20 000 a evned gant danvezioù berzet. E Park Doñana, e genoù ar star Guadalquivir eo e c'hoarvezas an torfed en hafv 1986. Ur mizvezh e kreder e pado ar varn ■

Laponia

Emañ Laponed Sweden, pe Saamied evel ma vezont anvet ivez, da gaout o Dael dezho staliet e Kiruna. An 31 kannad a vo bodet peder gwezh ar bloaz hag o devo da ren dreit-holl war ar sevenadur, ar c'helenn hag ar stummañ, hag an digoll mesaerion kirvi taget o zropelloù gant loened gouez. O Dael a vo gonezet gant Saamied Finland e 1973, ha re Norge e 1989. "Pell emaoamp c'hoazh a seveniñ hor pal sevel ur gwir riez da bobl ar Saamied", eme Ingvar Ahren, penn Kevarzh Saamied Sweden ■

Slovakia

Bihanniveroù

Miklos Duray, penn Magiariz Slovakia, a lavar ez eo gwashaet stad ar bihanniveroù eno : "Gwasket e vezomp mui-ouzh-mui evit ma kuitfomp lec'hioù m'emañ hon annez abaoe kantvedoù. Dindan gouarnamantoù demokratel ez eo gwashoc'h an traoù eget dindan ar gomunourion."

Dinaozañ

Reuz zo savet etre Hungaria ha Slovakia, pa fell da ouarnamant Slovakia dinaozañ ar ster Dannau a-hed 30km a harzoù gant Hungaria endeeun. Ampellet eo bet an dinaozañ hogen da vezañ graet d'ar 7 a viz Du hervez levierion Slovakia ■

Herve Kerrain

Belgia

E Belgia ne vo ket a servij soudard ken. Sed a ginnig ar gouarnamant. E 1993 ne bado ar c'hoñje nemet 8 miz, e-lec'h 10 bremañ, hag adal Genver 94 ne vo ket anezhañ ken. Lavaret a ra Ministr an Difenn e koust re ger an arme evel m'emañ bremañ ; lavaret a ra ivez n'eus ket ezhomm ken eus un arme ken bras, goude an holl gemmoù zo deuet en Unvaniezh Sovietel hag e Stadoù Reter Europa. Ne chomo en arme nemet soudarded a-vicher eta, un 40 000 bennak anezho. Nebutoch a dankoù hag a girri-nij a vo gant an arme ivez-hogen petra a vo graet gant an armoù re ? O gwerzhañ d'an estronvro ? Nec'het eo ar beoc'hgarourien. Nec'het eo ivez, an tammig, ar c'hvedredigezhioù a implije arbennourien. Evel e Breizh hag e Bro-C'hall o doa ezhomm eus al labourerien varc'hadmat-se ...

I.K.

Bep daou viz lennit

AL LANV

59 hent Kerdronioù Vihan
29000 Kemper

Koumanant bloaz : 150 lur
Skoazell adalek 200 lur

Kanakeg degemeret d'ar vachelouriezh

Degemeret eo bet ar c'hanakeg da "yezh rannvroel, an dekvet hini degemeret d'ar vachelouriezh gall" (ar re all : brezhoneg, gallaoueg, euskareg, katalaneg, korseg, okitaneg, tahitieg, eizaseg ha mozeleg).

Euskareg

Divizet en doa Enseller akademiezh Pau nac'h reizhañ arnodenn istor-douaroniezh eizh skoliad ur rann divyezhek : en euskareg e oa bet respontet ganto. "Droukziforchañ n'eo ken", eme Ikas-Bj (aozadur ar skolioù divyezhek), lakaet al lez-varn vellestradurel da bledif gant an afer gantañ. Kas a ra da soñj ar varmerien ne vez kudenn ebet da reizhañ skridoù saonek pe alamanek skolidi liseoù etrebroadel.

Guarani, yezh ofisiel

E Paragway, e Kreisteiz Amerika, eo chomet bev-tre yezh an Indianed a oa o vevañ eno a-raok donedigezh Europiz, ar guarani. D'oust dezhañ da vezañ yezh an darn vrasañ eus annezidi ar vro eo bet gwasket ar guarani e-pad pell-abaoe 1537, pa oa en em gavet Spagnolez er vro, betek an ugentvet kantved. N'eo nemet e 1967 e oa bet anavezet evel "eil yezh vroadel", ar yezh ofisiel nemeti a oa ar spagnoleg avat. E Bonreizh nevez Paragway, degemeret e miz Mezheven 92, eo bet lakaet ar guarani da yezh ofisiel, par d'ar spagnoleg. Desket a vo an div yezh en holl skolioù, ha graet e vo skol dre an div yezh. Lakaet eo bet da bal d'ar Stad reiñ d'an holl dud un deskadurezh hag ur stummadur an div yezh ha dre-se krefivaat ha kadarnaat an daou sevenadur hag an div yezh zo e kevredigezh Paragway. Evel-se e vo digollet annezidi ar vro eus ar gaou bet graet d'an darn vrasañ anezho e-pad bloavezhioù, ha roet e vo d'an Indianed an tu da gemer perzh e buhez hag e renezh ar vro.

I.K.

Deskiñ yezhoù e Danmark

N'eo ket peogwir o deus nac'het degemer Emglev Maastricht dre ur referendum e c'haller lavaret diwar-benn Daniz in serret warno o-unan. Diskouezet he deus ur sontadeg graet e Danmark nevez zo e oa gouest 57 % eus an dud deuet d'an am zibab mat e saoneg, 33 % anezho a c'hall ober kement all en alamaneg, ha 3 % e gallec. Evit ar re yaouank en oad da guitaat ar skol e kaver ar sifroù-mañ :

97 % a c'hell kaozeal saoneg, 59 % zo gouest da alamaneg ha 14 % da c'hallec. Koll lañs a ra ar saoneg avat, hag evit muioc'h-mui a bostioù labour e c'houlanner digant an dud gouzout alamaneg rak e bad an armerzh eo pouezañ goust yezh an amezeien dostañ. 58 % eus ar pennoù embregerezhioù zo gouest d'ober o aferioù en alamaneg, 80 % ne ouzont ger gallec ebet. Yezh ar vakañsoù e Bro-C'hall eo ar gallec evito ha netra ken. Ha n'eus anv ebet da glask gwellaat stad ar c'hallec gallec rak, eme aozerien ar sontadeg, n'eus seblant ebet e c'hallec ar gallec dont da vezañ ur yezh vras en eskemmoù etre Europiz en amzer-dazont, gwalc'hoec'h eo deomp postañ hon arc'hant, emezo, da elodusaat c'hoazh kelenn ar saoneg hag an alamaneg. I.K.

Kuzul-Rannvro evit ar yezh

E diabarzh Kuzul-rannvro "Languedoc-Rosello" (pe gentoc'h "Languedoc-Roussillon", er yezh nemeti anavezet gant ar stad hag he bonreizh) ez eus bet savet ur c'hennstrollad d'ober war-dro ar sevenadurioù okitanat ha katalanat. Krouet eo bet diwar intrudu dilannadeg ar Re C'hlas eus departamant ar Gard, Marianne Sabatier, 10 kuzulier eus holl strolladoù politikel ar C'huzul zo ennañ, nemet eus ar "Front national".

An 3 dilennad katalan (eus ar PS, UDF, RPR) a zo e-barzh a ray war-dro ar c'hatalaneg eta.

Lavarout a ra Marianne Sabatier eo bet a-viskoazh soñj ar Re C'hlas e oa ret "difenn ar personelezhioù rannvroel" hag e c'helle ar c'hennstrollad bezañ ur "strollprederiañ mat", diwar skwer Breizh "e-lec'h ma'z eus ur c'hennstrollad ael war-raok kalz a-zivout difenn personelezh Breizh".

Ur veaj da Vreizh zo da vezañ aozet, eme prezidant ar c'hennstrollad. (diwar El Punt, sizhunieg katalaneg eus Perpinya)

Notenn : Mesket eo gant Marianne Sabatier "ar c'hennstrollad evit ar yezh" (ennañ dilennidi eus ar c'huzul rannvro hepken), ha n'eus netra heñvel e Kuzul Rannvro Breizh (rannet), ha "Kuzul Sevenadurel Breizh", ennan dileuridi eus kevredigezhioù zo hag un nebeud politikarian.

M.K.

Katalaneg

Evit ar re ac'hanoec'h a soñje dezho c'hoazh ne oa ar valensek nemet ur rann-yezh katalaneg selu amañ ur arguzenn ho lakay da gemmañ mennozh raktal.

Troet eo bet an holl yezhoù kefridiel eus ar Stad testannoù daskemmadur ar Vonreizh - d'he lakaat da glotañ gant feuremglev Maastricht - hag embannet eo bet an troidigezhioù er BOE (kannadig kefridiel ar Stad). Etre ar skrid katalaneg hag an hini valensek ez eus... ur ger a ziforc'h (ma ne gontet ket daou fazi reizhskrivadur). Ur ger en ur skrid zo 55 linnen ennañ, memestra. Kenstrivadeg : troit e brezhoneg Mallad 188 B Feuremglev Maastricht (zo 55 linnen ennañ). Kasit ho troidigezhioù da v/Bremañ hag e vo lavaret deoc'h pet yezh keliek a gomzer e Breizh.

Gw. E.

Plas ar brezhoneg war France 3

20 munutenn nebeutoc'h e 1992
Pet nebeutoc'h ar bloaz a zeu ?

N'eus ket bet kalz a drouz e Breizh warierch ar c'holl a zo bet war an abadennoù brezhonek e miz Gwengolo, war "France 3". Gant ugent munutenn nebeutoc'h ez eo un drederenn eus amzer an abaden brezhonek sizhuniek a zo bet kollet ! Klevet ez eus bet e vefe roet un tamm plas d'ar brezhoneg en abadennoù-noz, met betek hen n'eus bet gwelet netra.

Ken kustum e veze bremañ eus ar c'hemmoù a vez bep bloaz (pe aliesoc'h zoken a-wechoù) war euriou pe deziou an abadennoù ez eus bet soñjet e oa un taol evel-se ur wech ouzhpenn. Met siwazh da grediñ a zo ez eo bet kollet da vat an ugent munutenn-se ha n'omp ket prest da gaut anezho en-dro, ha n'eo ket an nebeut munutennou ouzhpenn a vez war ar sizhun a c'hañcho un dra bennak.

Gwashoc'h a zo : ken gwan ma 'z eo bet ar "trespont" goude an taol fall-se (a-berzh sindikadoù ar skinwel, an dilennidi, ar strolladoù politikel, sevenadurel, ...), e c'helle renerc'h France 3 soñjal e vefe tu dezhi krennañ muioc'h c'hoazh war amzer an abadennoù-se, hep lakaat freuz er vro.

Petra a gont hiziv evit ar chadennoù skinwel, publik pe brevez ? Dastum arc'hant dre ar bruderezh an hini eo a-benn kempouezañ o c'hontoù. Ar pal a zo bet merket war France 2 ha France 3 a zo kreskiñ ar sammad arc'hant o tont eus ar bruderezh eus 20% e 1993. Sklaeroc'h eo c'hoazh an traoù pa weler ez eot da glask tud o tont eus stalioù evel "Médiamétrie" (a zo he labour muzuliañ gant pet a dud e vez sellet ouz ar skinwel, hag evit F3 zoken. Lakaet e vo an dud-se da sevel abadennoù a zegaso tud dirak o skrammoù (lezenn an "Audimat" eo).

Tu a zo da soñjal eta eo gwall defival amzer da zont an abadennoù brezhonek war ar skinwel (salv ma vin dislavaret), ha ma ne stourmer ket evit difenn ar pezh a zo dia, e vo diaezoc'h c'hoazh da gaut ur ganol brezhonek en amzer da zont ■

Yann-Fañch Kerneis

Diviz foran

D'ar Sul 22 a viz Du, adalek 14 eur 30, e vo e Ti-Kêr Gwengamp un diviz foran diwar-benn :

"Petra a fell deomp kaout evit ar brezhoneg ?".

Aozet e vo an diviz-se gant Stourm Ar Brezhoneg, ha kaset e vo en-dro gant ur c'helaouenner eus Radio-Breizh-Izel. Pedet eo bet da gemer

perzh enañ, estreget Stourm ar Brezhoneg, Per Denez, André Lavanant, Fañch Broudig, Ivon Abiven, Pierre-Ivon Tremel, Jef Philippe, Goulc'hann Kervella, ... Deuit holl da selaou anezho o tivizout hag o prederiañ war ar plas a fell deomp reiñ d'ar brezhoneg warc'hoazh, war ar pezh a fell deomp kaout evit yezh hor bro.



Istor

Roparz Hemon taget

"Roparz Hemon : ur gouennelour kenlabourer d'an Nazied". Sed aze komzoù distaget e Spezed an Hañv diwezhañ gant Jean Le Lagadec, Prezidant "Unvaniezh Kevredigezhioù Breizh". An aozadur-se, a vod un nebeut kevredigezhioù e Pariz, zo tost eus ar strollad komunour Gall (PCF). Ur gazetenn a embann : "Pays Breton". E Spezed eta e oa 'n em gavet izili an Unvaniezh evit o emvod bloaz e Breizh. Kendalc'het en doa Roparz Hemon da labourat evit ar Brezhoneg e-pad ar brezel, sed aze petra eo bezañ gouennelour ha kenlabourer d'an Nazied evit Le Lagadec.

Gw.C.

1993

Radio Kreiz Breizh' vo 10 vloaz

Staliet e Sant Nigouden, e-kichen Kallag abaoe 1983 emañ Radio Kreiz Breizh o vont da lidañ he deket bloaz e miz Ebrel kentañ. B'emaomp da vat o prientiñ ar gouel evel m'eo dleet dre ginnig ur rollad abadennoù e-doug tri devezh, du-mañ e Sant Nigouden.

Raktres :
- d'ar Gwener 23 a viz Ebrel : beilhadeg e brezhoneg en un ostaleri eus ar vro ;
- d'ar Sadorn 24 : diviz o tennañ da lec'h ar skingomz lec'hel e Breizh. Koan vras, sonerezh ha fest-noz da c'houde.

- d'ar Sul 25 : gouel e-pad an deiz, standoù ha stalioù liesseurt. Sonadeg ha fest-deiz.
Ho pet soñj, adalek bremañ, eus deiziadoù an darvoud-se, a vo d'an 23,24 ha 25 a viz Ebrel 1993.

Ar stourmad nac'h-prenañ Enep piv ?

Youc'hal a c'halv an holl Vreton(ez)jed da heuliañ ar stourmad nac'h-prenañ savet gantañ a-enep produioù Mac Donald ha Coca Cola evit enebañ ouz politikerezh diabarzh ha diavaez ar Stadoù-Unanet ha neuze evit fiatrañ ar pouez o deus an embregerezhioù etrebroadel war ar sevel-politikerezh-se.

N'eus ket un toullad hufverien a'chanomp rak gouzout a ouzomp re vat n'en do ar stourmad-mañ efed ebet na war stad arc'hantel Coca Cola pe Mac Donald na war bolitikerzh ar Stadoù-Unanet ha pa ve heuliet gant 100% eus an dud. Kentoc'h ez eo pal ar stourmad diunañ ar miuañ posupl a dud ha diskouez pegen nechet omp dirak politikerezh etrebroadel ar Stadoù-Unanet hag e efedoù.

a levezon war emzalc'h hor c'henvid(ez)ed ha poent bras eo gervel an dud d'an evezh.



Perak ar Stadoù-Unanet ?

Perak tagañ ar Stadoù-Unanet nemetken ? Ha n'eus ket a stadoù all evel Israel pe Su-Afrika hag a ve ken rat all o zagañ an abeg d'o folitikerzh pe da vriou mab/merc'h-den ? Geo, anat eo. Met n'omp gouest da labourat nemet war un dachenn war un dro ha diouzh un tu all e vez pleustrat war kudennoù stadoù evel Israel pe Su Afrika gant kevredigezhioù all endeo. Diouzh an tu all c'hoazh e tiskouez ar Stadoù-Unanet bezañ ar Stad nemet hag he devez kement

Etre Leon Ha Kerne

Ur strollad nevez evit kas war-raok ar brezhoneg e Bro Landerne

E Landerne ez eus bet roet lañs, nevez zo, d'ur gevredigezh nevez, Etre Leon Ha Kerne hec'h anv. He fal : kas war-raok ar brezhoneg e Bro-Landerne. War meur a dachenn : ar c'hazetennoù, ar c'hannadigoù-kumun, an anvioù-lec'h, ar skolioù, ar vuhez foran, ar c'hanwerzh... Klasket e vo brudañ ar brezhoneg, broudañ an dud : da zeskiñ ar yezh, reiñ d'ar yezh ur stadud uhel e spered an dud : Klasket e vo krouiñ, war un dachenn lec'hel, ur vuhez spered pinvidik e brezhoneg : kazoadennoù a vo graet, e brezhoneg, gant tud pedet, diwar-benn danvezioù anavezet ganto. Kaset e oa bet en-dro ar gaozeadenn diwezhañ gant Mikael

Madeg, e miz Here, diwar-benn anvioù-lec'h Bro-Leon, ha re Bro-Landerne peurgetket.

E Brezhoneg hag e brezhoneg hepkan e vo graet an traoù.

D'ar Sadorn 7 a viz Du, bodadenn vizek Etre Leon Ha Kerne : da 3e, Sal Ti-Kêr, Kae Bro-Leon, Landerne. Danvez : plas ar brezhoneg e skolioù Bro Landerne. Da 5e, prezegenn gant Filip Oילו, diwar-benn beaj kentañ Kristof Koulm da Amerika. Digor ha digoust d'an holl.

F. Oילו.

Pemp abeg mat

1) Impalaerezh trevadennel "sevenadur" ar Stadoù-Unanet. N'eus nemet tourel ur sell ouz stad an traoù er Stadoù-Unanet hiziv an deiz a-benn melzañ pegen nozus eo an efed en devez an enep-sevenadur-se war gevredigezh Norz-Amerika : gwallerazh, laerofti, muntrerezh, gouennelouriezh, taolioù-leul...

2) Emelerezh aktivel-tre ar Stadoù-Unanet e aferioù stadoù all -dreist-holl en Amerika Latn e-lec'h ma vez gwelet skiaer-tre efed nozus ar blokuz a-enep Kuba war hec'h armerzh ha war barr-bavañ Kubaniz. Kompren a reer re vat da belec'h e chail kas ar politikerezh emellour-se : Viêt-Nam, Korea, Kuba.

3) Fallout a ra dimp divaskiañ ar pouez o devez an embregerezhioù etrebroadel war bolitikerzh holak ar Stadoù-Unanet. Hag ur skwer gwelloc'h e va eget Mac Donald ha Coca Cola ? Ret eo sevel a-enep lezenn an arc'hant hag a vez trech war gwrinoù ha frankia an dud.

4) Gwasket ha mac'homet e vez pobloù hengounel ar Stadoù-Unanet. Penaos e c'hellomp-ni, breton(ez)jed chom hep fiatrañ kement-se ?

5) Dre gorvoniñ ar c'hoadeier trovanel en un doare mantrus evel ma ra embregerezhioù evel Coca Cola pe Mac Donald e vez distrujet an endro.

Neuze, dre nac'hañ prenañ ar produioù-se, aroueziet-tre eus holl vrelnadur ar Stadoù-Unanet, an em warezomp diouzh bezañ kontammet gant ar vosen-se hag e tiskouezet ivez bezañ a-unan gant pobloù gwasket Norz-Amerika hag Amerika latin Mar fell deoc'h kout titourat ouzhpenn, skrivit d'ar c'homlec'h a-dal :

Robert Baxter, Ar Bourk, 29870 Kozmael

KELAOUENN

Breizh gant ar mintel

Keleier berr
Gouelioù ha festoù noz
Stajou sonerezh koroll brezhoneg
Chomlec'hioù, Mouroù a bep seurt
Levrou nevez embannet
Skol Uhel ar Vro

Keleier
e brezhoneg
hag e galleg

Kasit keleier deomp
99 87 69 12 faks 99 63 82 28

3615 KELA

bremañ 134 - miz Du 1992

Ar Vormoned

Istor ur sektenn oc'h ober berzh

gant Paol ar Meur

Tremen an hanter eus annezidi Salt Lake City a zo Mormoned. Heuliañ a reont lezennoù bevañ strizh ur relijion iskis. Pa straner dre straedoù o c'heoded e teu anat pouez bras o liiz er vuhez sokial. Ober a ra ar profed Mormon e renkoù war ribloù al Lenn Sall.


L'avaret hor bos kenevo da endro sebezus Yellowstone, d'ar glav beuz a zezsasche war ar c'hoadivier puluc'het gant langwall drabus 1988. Tremenet e camp dre Paris, ur vourc'hig distar a oa a-strew enni panelioù treset warno an Tour Eiffel. Ober a raemp roud trema ur su heollet skedus. Ha setu keoded ar Vormoned oc'h en em zispakañ dirazomp, divent ha sioul eston e gwrez ur sulvezh, ur geoded amerikan. Heñvel ouzh nouspet hini all, gant balioù ledan ha skraberñ-oabl. An ehan a voe berr, gant ar mail a oa warnomp skeñt war-du kazinoù Reno, amez ober un droiad war droad dre ar chrisz-kêr, etre Parlamant ar Stad, ul klijant diwar patrom hini Washington, ha Templ meurdeuzus liiz Jezuz Krist Sent an devezhoù diwezhañ, liiz ar Vormoned.

An hini youlekañ, an hini divoutinañ e voe sektenn ar Vormoned e-touesk ar c'humuniezhoù relijiel a reas o annez e komog kaz-didud ar rannved nevez. Krouet e voe ar sektenn e 1820 gant ur paotr yaouank eus Hantnoz Stad New-York, a oa Joseph Smith e anv, war-lerc'h e gajadenn gant daou ael war toenn goadek Cumorah, e-kichen Palmyra. Deut e oa el lec'h dizarempred-se a-benn pedin digevnez evit silvidigezh e ene. Kemenn dezhañ a reas an daou welaender dic'hortoz, ne vefe ket pell ma tegemerfe digant ur c'hannad eus an neñv, lestenn glok an Avel. Un ael anvet Moroni eo a voe fiziet ennañ ar peñdi-se gant Doue. Diskouez a reas d'ar Penedour al lec'h ma oa enkravat ar skrid sakr engravet war plakannoù sour e oa karget da vrudañ. Dont a reas Joseph Smith a-benn da zigejañ ar steudadoù arouezhinioù dre implij daou vaen, an Urim hag an Thummim. Echu al labour treñ gant an danvez profed, ez eas ar plakannoù sour hag an daou vaen gant an ael. Embannet e voe an droidigezh e stumm ul levr : kevñ ar Mormon. Danevellet a ra istor kozh hermoù Amerika. Lenn a reer ennañ e leus Jezuz war-lerc'h e zasorc'h da sevel ur skour eus e liiz e touesk Hendaoù an Indianed.

Lusk a voe buan gant ar Vormoned. Prezegennoù ar profed a reas berzh, a sachas forzh tud leun a feiz davetañ. O vezañ ma oa ganib ar gwir hervez reolennoù o relijion da vezañ lieswreger e sachjont kasoni en o

c'hevner. E-kerz ur taol-freiz en o enep e voe krouget Joseph Smith hag e vreur. Un eil brofed a gemeras penn an traoù er sektenn, Brigham Young. Ober a reas hermañ e venoz da dechout diouzh un endro kontrol da lezennoù ar Vormoned a-benn kavout un tolead diberc'henn e-kreiz ar meneziaer roc'hlec'h ma tiazefe ur gevredigezh d'zalc'h evit e genfeizid. Dibab a reas ar Vormoned an douaraier strujus a choarie an dro d'al Lenn Sall evit diazezañ o Republik emren : Deseret (Gwenanenn er yezh a zo bet troid diwarni al Lev. Mormon). Kentañ ekonomiezh steufvaet Amerika voden e voe o mod trevadennañ. Petra bennek ma vellestre ar proled ar vro en ur mod unveliek, ne glemre ket e renidi, gant a reizh ma oa e zivizoù. Krennet e voe ment an tolead Mormon pa deus da vezañ ur Stad amerikan, ar Stad Utah.

Hiziv an deiz ez eus dre ar bed etre pemp milion ha c'hwec'h milion a Vormoned. An dredetenn eus an tri milion a Vormoned Amerikan a zo o chom er Stad Utah. Profañ a ra ar feizid dek dre gant eus o c'horvod d'an liiz. Deut pirdik-mor, emañ gant ar braz eus tourioù Sall Lake City. Brudañ a ra hec'h ideologiezh gant he skirvañ, he cheloaouenn bemdeziek, he div chadenn skinvel. Karget e



An ti a chome ennañ ar Profed Brigham Young, e 17 gwrez hag e 56 bugel.



An ael Moroni o vont e darempred gant J. Smith en e gamb

vez ar Vormoned yaouank da foetañ bro evit embann o aviel e-pad daou vloaz hep skoren digant an iliz. Sevel a ra taer pennoù ar Vormoned a-enep ar menozioù gwregelour. Eskumunget eo bet ar Vormoned Sonia Johnson abalamour d'he stourm evit an ingaldet etre ar wazed hag ar merched. Rost ez eus bet lañs endro gant ur skour dirvoudourien da gustum al lieswregezh, ur c'hustum set da get pa ne c'helle ket gantañ ar Vormoned mont da goadeddi eus ar Stadoù-Unanet. Bevañ a ra kalz anezho e Meksik. Sturmañ a reont ur gumuniezh a 5000 ezel e Colorado City tra ma vod o skour 40 000 a izili ■

Kaoter Gundestrup

Ur pezh orfebourezh indiat ...

Bet dizoloet e 1891 gant taouarc'herien e Denmark, he deus kaoter Gundestrup (lec'h ma oa bet kavet), tost da zek kilo arc'hant, ur volenn hag unnek plakenn metal glan, lakaet kalz a dud, skiantourien ha tud all, da skrivañ war he divout.

A-drugarez, pe dre fazi, tud e-giz ar registourur alaman G. Kossina, en doa savet teoriennoù "pobloù glan", bet adimplijet gant an Nazied war-lerc'h, er bloavezhioù 1920, e oa bet kemmesket holl ardivinkoù bet kavet en ul lec'h reas a-benn sevel ur sevenadur evit ur bobl, e-giz ma ne vije bet eskem ebet etre sevenadurioù ha pobloù. Ha setu ma oa bet gwelet kaoter Gundestrup evel ur pezh arz keltek, Kernunos ha Taranis warni. Diskouezet e oa bet kaoter Gundestrup e Daoulaz daou vloaz 'zo, gant un diskouezadeg veur diwar-benn ar Gelted, ha setu m'eo deuet bremañ he skeudenn da arouez ar gallegezh gant an holl : adkavet e vez war bruderezh ar gouel "Keltomania" e Naoned, pe e-barzh film



An doueaz Hariti

R. ar C'hoadig a-zivout Kredennoù ar Gelted kozh, bet tremenet war FR3 nevez'zo.

Hariti pe Rhlanon

Hogen ur skoilh bras a-walc'h a zo war hant keltegezh ar gaoter : n'eus bet adkavet skouer all ebet eus ur pezh orfebourezh arc'hant gant ar memes doare labour war dachenn emled ar Gelted. Al lec'h tostañ ma veze labourer an arc'hant gant an doare-mañ d'ar mare-se (ur c'hantved pe zaou a-raok J.K.) a zo e Tiras, etre Turkia ha Gres. Dre ma veze trouzet alies-tre ar c'horn-bro-se gant bandennadoù Kelted, Trased ha Germaned, en doa gallet an gaoter da Zenmark, lec'h ma oa bet kollet. Mesket e veze kalz pobloù ha sevenadurioù e gavret

An doueaz Lakshmi



Europa da neuze.

An olifanted a vez gwelet war meur a blakenn o deus kaset T. Taylor, registourur amerikan, da soñjal e oa marteze levezonet sevenadur orfebourien ar gaoter gant hini India : an doueaz a vez gwelet o neuial, daou labous ganti a-gleiz hag a-zehou, a c'helle bezañ Rhlanon, diskouezet e-giz-se er Mabinogion, hogen ivez Hariti, doueaz indezat, a vez gwelet ur skeudenn damheñvel outi war medalennoù bet kavet e Rawalpindi (Indez an Norzh). Damheñvel eo ivez skeudenn ur vaouez etre daou olifanted ozh doare-diskouez hengounel Lakshmi, doueaz indezat ivez. Ha skeudenn brudetañ ar gaoter, hini an den gant kerniel, lesanvet Kernunos, a vez adkavet, azezet e lotuz ivez, war ur siell e Mohenjo-Daro, kêr indezat war ar stêr Indus. Taranis, douez e rod, a c'helle bezañ Vishnou ken eas all.

Ha neuze, indezat pe kelt ?

Adkavet ez eus bet ur bern traoù e-barzh bezioù kelt, e metal ivez, tromplioù, tokarnioù, skoadoù, bravigoù ha pezhioù-moneiz, warno tresadennoù a vez adkavet ivez war plakannoù kaoter Gundestrup : penaos diskoulmañ ar gudenn da neuze ? Kelt pe tras pe indezat, ar gaoter ? Ha ma ne vefe ket ar gudenn ken stank ha ma seblant ? Prouennoù zo e oa teknikoù, pezhioù-moneiz, hag orfebourien zoken, o tremen hag o vaes, eus India registorel eus mare ar gaoter, eus India d'ar Balkanoù, 6000 kilometrad alies. Ar pobloù kozh n'o doa ket kalz liammoù gant ar stadoù a-vremañ, an harzoù sevenadurel ne oant ket termenet mat-tre, hag an darempredoù etre an dud hag o doueaz, ar relijionoù, liesseurt ha gweñ a-walc'h. Ma leufe en-dro seurt doareoù ne vefe den evit klenn, neketa ? Hegareg

Kudenn kleñved ar vuoc'h foll

An dud a c'hell kouezhañ klañv ivez

Lazhet zo bet e-kerz ar c'hwec'h vloaz tremenet un 70 000 bennak a saout e Bro-Saoz abalamour d'ar c'hozh c'hleñved-se. Gouizieien zo a soñj dezho bremañ e c'hellfe ar boued hag al louzoù bezañ saotret pe kontammet ivez.

**Danevell-skrid
Dominique Dormont**

E miz Ebrel diwezhañ e oa bet gouennet gant Hubert Curien, Ministr an Enklaskoù d'ober un enklask pizh diwar gudenn kleñved ar saout foll. Selu amañ ar pezh a zo bet kavet gant an Ao. Dormont hag an enklaskerien all.

posupl eo d'an den kouezhañ klañv goude bezañ debret kig ul loen klañv pe c'hozh goude bezañ graet gant louzoù aozet a-ziwar bouedenn-benn ul loen klañv (ar saout dreist-holl). posupl eo d'an douar ha d'an traoù bet hadet e-barzh an douar-se bezañ saotret-mik, ma vez fuitlet warnañ temz-ludu, ennañ tammoù kig drailhet munut al loened klañv.

An A.T.N.C.
("agent transmissible non conventionnel")

Hennezh eo penn-kaoz an holl waleurioù bet c'hoarvezet d'ar paour kaezh saout a Vro-Saoz. N'eo ket ur viruz pe ur bakterio na n'eus forzh piv kennebet rak an ATNC-mañ zo kalet e bann ha tev e jer. Hennezh a chom yac'h-pesk ha disablant-kaer hag eñ soubet "penn-kil-ha-troad" er formol pevar devezh diouzh renk. Arabat kredin e vo trawalc'h deoc'h e lakaat da boazhañ didreuz evit e lazhañ pe e gas kuit ; an ATNC en em gav en e vluad betek 160° (-un devezh pad- N'eo ket a-benn warc'hozh, d'erc'hant an devezh, ec'h ay ar bec'h-se diwar gain medisined Minister ar Yec'hed).

Boued ar bugaligoù bihan

Ha selu perak ar re-se o deus graet o soñj, mall warno, (afar mantrus an emolled n'eo ket aet e dan da ludu

bremañ 134 - miz Du 1992



c'hozh), hag o deus difennet nevez 'zo da werzhañ un ugent louzaouenn bennak aozet a-ziwar kig-saout. Trizek all anezhe a zo bet lakaet da baouez d'ober ganto betek ma vint adaozet en un doare disheñvel. N'ebet amzer war-lerc'h setu tro ar podadigoù boued evit ar vugale vihan, enne bouedenn-penn saout da vezañ difennet da werzhañ.

An temz-ludu

Paotred an temz-ludu n'int ket chomet er-maez eus ar jeu tamm ebet, ar c'hontrol mik an hini eo zoken. Rediet int bet da baeañ etre 2600 ha 10 000 lur evit ma vefe diskleriet "mat d'ober

gante" an temzoù-ludu aozet a-ziwar korfou drailhet munut al loened marv, rak, abaoe 1986 dija, e ouier e c'hall tremen ar c'hleñved eus ul loen d'egile an den, ugent vloaz goude Arabat deoc'h koll pasianted, pe lezel ho kwad da vont e dour rak evit bezañ sur-divrall e c'hellfe un den kouezhañ klañv goude bezañ debret kig-saout e vo ret dezhañ gortoz ur pemzek pe un ugent bloavazh, amzer d'an ATNC da doullañ e arv ha d'ober e reuz sioul ha sioul ha didrouz-kaer er c'horf ■

Pascal Tabuteau
(Diar "La syndrome de la vache folle" gant Didier Dubrana - Science et vie niv 902 miz Du 92)

Sevenadur

20 vloaz Dastum

Milladoù a dud a oa 'n em gavet e Berrien e Menez Aré evit lidañ 20 vloaz DASTUM. A-bep seurt traoù a oa kinniget d'an dud. Sonerezh pobl ha kan diskouezet hervez ar broioù : Kernev, Leon, Treger, Gwened ha Breizh Uhel.

Kontadennoù e Brezhoneg hag e Galleg. Kig bevin ouz ar ber.

Felst-deiz fest-noz e-pad 12 eurvezh d'ar Sadorn ha d'ar Sul, Plijadur ha sevenadur, daou c'her a glot, neketa ?



Gwerzh dre lizher ur benveg nevez

Evit kas ar brezhoneg war-rack ez eus ezhomm kaout binvioù a bep seurt. Gwerzh Dre Lizher a zo unan anezho. Kinnig a ra d'an holl embannerien brudañ o froduioù : spilhennoù kenkoulz ha krañnoù, kasedigoù kenkoulz ha levrioù. Ne c'houlenner nemet un dra : ret eo kaout ar brezhoneg par d'ar yezhoù all (ma vez deuzout.)

Kinnig a ra d'ar brasañ niver a c'hall (12000 evit poent) ar pezh a zo bet fiziet enni (war 12 pajenn e liv, gant displegadurioù e div yezh : brezhoneg ha galleg. An doare ober a zo modern ha brav.)

2 niverenn

2 niverenn a zo bet embannet dija (11/91 ha 6/92). Unan all a vo d'ar 11/92 gant traoù nevez e-barzh : levrioù gant Kan an Drak (kanaouennoù da zañsal.) Dastum, An Here, Skol An Emsav, Keit Vimp Bev... met ivez kasedigoù, spilhennoù nevez. T-shirtoù nevez ivez... kartennoù "Bloavezh mat"... hag ur prof evit pep prenadann ! War wellaet ez a Gwerzh Dre Lizher,



Hatoup, ur c'hoari nevez !

eta. Met kalz a hent a chom d'ober : - d'an embannerien da grouiñ traoù nevez ha da gas keloù da GDL - d'ar praktikoù, deoc'h, da vrudañ al levrig-tro-dro deoc'h, en ur gas deomp chomlec'h ho mignoned dedennet gant GDL. Kaset e vo dezho ur skouerenn deus an niverenn 3. - Da GDL da c'houzout reiñ lañs d'ha raktres evit ma teufe anat d'an holl eo ur benveg ret, e servij an holl.

Gwerzh Dre Lizher 29520 LAZ

TI Ar Brezhoneg (Pariz)

Pennadoù-kaoz

21 a viz Du en abardaez
"Evel ar C'hap, n'eus bro ebet" gouez d'ur c'hrennlavar ha da bPierre Mens en deus e zastumet du-se. Pierre Mens, kaper eus e stad, a vo en hor metou ar 21.11.92 da 4e g.k. evit gounit ac'hanomp da vuzhudoù al ledenez vrudet-se eus Kornog Breizh a zo bet reuziet ganti ouz brezel an "atom" tremen dek vloaz zo bremañ. Ouzhpenn un ergerzhadenn dre luc'hskudennoù war devinier krin ha kildrañioù bodennek ho po tro ivez da voemañ ouz brezhoneg ar C'hap, rak enrolladennoù a vo selouet. Un degouezh aspar evit ar yezhourien a zo ac'hanoc'h da emskiantañ ouz an izoglosoù-se eus hor yezh o deus graet d'al loened astenn e nask a-dreuz ar mor dirollt ha balir greunvaenak Bèg ar C'havr betek ar pep peññ eus Kerne.

12 a viz Kerzu da 4eur
Pemp kant vloaz goude Christophe Colombo e voe tro ar bloaz-mañ da bPaol ar Meur dizoleiñ Amerika. Ne vito ket an dale-se ouz hon ergerzher du-mañ d'ober un dezrevall dibar deomp eus e veaj ma vo mezhekaet a-dra-sur ganti e ziaroer hollrudet, rak, evel ma oar an holl, n'eo ket Amerika en doa lakaet hennezh da bal e verdaedenn hogen An Indez...

Amerika, da gompen amañ er ster strishañ a roer dezhi, da laret eo "Stadoù Unanet Amerika", an hini a vo neuze danvez ar Brezegenn a vo kinniget deoc'h e TAB d'ar 12.12.92 da 4e. Da reiñ an diskan da bPaol hor bo ivez war al leurenn un ergerzher a-gozh all eus ar c'hevandir tramor, ar c'helenner Mark Gwilhou, anavezet gwelloc'h evel prezidant hor c'hevredigezh. Hag e c'heller magañ ar spi e vo an deiz-se derou ur c'henlabour froezhus etrezo...

TI ar Brezhoneg, 15, rue des Tourelles 75020 Paris

Kreizenn Roparz HEMON

Ur Brezegenn e brezhoneg a vo kinniget gant Kreizenn Sevenadurel "Roparz Hemon" (plasañn Verdun, Gwengamp) d'ar Meurzh 3 a viz Du 1992 da 8e30 noz. An Ao. Gi Yonkour an hini a gomzo diwar-benn :

"Loened-gouez -hep tud gouez- e Breizh Izel" Skuendenn e vo ar pennad kaot gant diapioù. Mont e-barzh evit mann.

bremañ 134 - miz Du 1992

Ar yezh vev

Ur programm soubidigezh o kas Hawaïeg en-dro eus an islonk

War un dachenn poblet-a-walc'h eus gourhent Kamehameha e vez kavet un ilizig pantekostad, hag en tu kleiz d'al lec'h sioul-mañ, ouzh moger ur savadur daou solier dezhañ, en em ziskouez, splann hag efedus, ur panell o kas da skol ar Sul (solier kentañ), burev an iliz (a-gleiz), ha Punana Leo (a-zehoù). Daoust d'ar bir a zo ezhomm a-benn kavout ar sal skol nemeti, eo aet Punana Leo ("neizh ar mouezhioù") war-raok a-galz e berr amzer, a-fed menoz.

Punana Leo a zo anv ur skol kaset da-benn gant kerent, da bal dezhi buhezkaat en-dro yezh Hawaï dre an deusevel bugale. N'eo ket aes da dizhout kement-mañ, pa seller ouzh istor ar yezh.

"Niver an Hawaïegerien yaouank en tu-mañ da 18 vloaz, p'hon eus kroget gant ar raktres," a zistagas Namaka Rawlins, rener ar skol, "a c'helle bezañ kontet war bizied an daouarn".

An dra-se e 1982, pa tivizas ur strollad studierien war an hawaïeg eus skol-veur Hawaï, ha kerent war un dro, e oa ar vugale dazont nemetañ ar yezh en arvar. Kemeret e oa bet kentelioù-aozañ diwar skwer skol Maorieg, staliet mat e Zeland-Nevez, ha setu bet ganet Ana Punana Leo, ur gevredigezh oc'h ober war-dro diorroadur ar soubidigezh en Hawaïeg. Abaoe digoridigezh ar skol gantañ e Kekaha, en em ledas ar programm betek Maui, Molokai, hag Honolulu.

Hervez a vez klevet gant an anv, soubidigezh en Hawaïeg a zo soubañ skolidi e-barzh sevenadur ha yezh Hawaï. Evtl ar mare e chom a-sav d'an darez kentañ, evit bugale en tu-mañ da bamp bloaz. Da lavaret eo eo difennet d'ar vugale komz saozneg, er salioù kias da nebeutañ, hag hawaïeg eo ar yezh implijet.

"N'eo ket e-giz ma teskle ar vugale ur yezh nevez" eme Lilioe Wong, kumu (kelenner) ar skol. "Deskiñ a reont buan-tre ar yezh. Hag int o tont en ur saoznegañ zoken. Ne vez graet nemet komz en hawaïeg dezho. Soubet e vezont, ha neuz ne c'hellont nemet ober gant ar pezh a c'hoarvez tro-dro dezho".

Wong a lavar e vez bugale a ouel ur pennadig. En o aez e vezont buan avat

hag e ouzont tennañ gounid eus o binvioù nevez.

Ar gerent a zesk kement-all. E sell klokaat ar soubidigezh, e vez lakaet da zaskiñ ar yezh div eurvezh ar sizhun unan eus ar gerent da nebeutañ. Papa makua, kias ar gerent, a vez graet eus an dra-se.

Ar gerent a vez gorrekoc'h eget o bugale da dapout ar yezh, hervez Wong.

An It. Wong a zo bet mamm Punana Leo e 1987, a-raok mont da gumu, ha setu m'he deus gwelet ar skol eus an daou du.

"Chañs em eus bet", emezi, "dre ma teue hawaïeg flour gant an holl, kerent ha bugale, pa 'z on bet e-barzh Punana Leo Soubidigezh ar vugale kement hag ar gerent e oa".

Ha talvoudusoc'h-a-se e oa c'hoazh dre m'he doa brasaset an It. Wong en ur glevout ar yezh, hep bezañ biskoazh distaget ur ger zoken.

"Familhoù a-bezh a gomz hawaïeg, ha setu prouenn efedusted hon doare-ober", eme an Ao. Rawlins ; a-bouez-tre eo dre bouez ar familhoù e-barzh aozadur Punana Leo, kalz brasoc'h eget e-barzh kement skol diwar arc'hant ar Stad e Hawaï.

Betek ober war-dro kompenn an dachenn skol a vez goulnet digant ar gerent, dre m'eo re baour ar skol da implij tud d'hen ober. Eizh eurvezh labour ar miz a vez goulnet da nebeutañ digant ar gerent, evit kompenn an tachennoù hepken.

Ar gumu Wehi Na'auao a anzav eo pounner a-walc'h samm ar c'hargoù war chouk ar gerent e Punana Leo, gant an emvodou-rén miziek ouzhpenn. "Kenlodennerezh ar gerent a zo penn-gudenn ar skol", emezi, "dreist-holl

pa labour an tad kement hag ar vamm". A-bouez-bras eo mamestra, dre ma lak digreskiñ skodenn-emezelañ ar familhoù berr o arc'hant : diwar live an tailhoù-bloaz e vez jedet, ha setu ma ya ar skodenn-vloaz, 215 dollar he sifre, da 180 dollar evit ur familh en tu-mañ da 10 000 dollar he gopr-bloaz. Ment ar familh a vez kemeret e kont ivez, a-benn digreskiñ ar skodenn gant niver ar vugale, hag int enskrivet e Punana Leo pe get.

Mont a ra rann Punana Leo anvet Waiau Elementary eus ar skol-vamm betek ar seizhvet klas, e Pearl City, hag ar rann anvet Pu'ohala Elementary eus ar skol-vamm betek an dekvet klas e Kaneohe. Raktres Punana Leo war an hir dermen avat a zo mont betek ar c'hlas diwezhañ, hag a zo bet votet a-unvouezh d'an dael diwezhañ, gant an het ma vafe staliet e 1995.

E-barzh ar raktres e vo kavet ur eurvezh kental saozneg bemdez, en sell respont d'ar goulennoù a-zivout barregezh ar skolidi soubet e-keñver ar saozneg. Respont a ra Michael Long, klasker er skol-veur, gant skouer ar programm soubidigezh e spagnoleg Kalifornia : barrekoc'h studierien ar programm war ar saozneg ! Ha forzh penaos, eme an It. Wong, saoznegerien tro-dro d'ar vugale a levezon kalz skolidi Punana Leo, hag o yezh ivez. "Ur seurt "creole" a zo o tont diwar meskaj saozneg-hawaïeg".

Kudenn an arc'hant a vo a-bouez ivez evit diorroadur ar programm, ha setu ma vo strivet gant ar stourmerien a-benn kaout yalc'hadoù, kement hag ober berzh gant o gouel bloaziek, an Ho'oumau.

Skol Honolulu he deus kemeret perzh e-barzh programm kuzul deskadurezh Hawaï, hag eskemmoù a zo bet aozet etre kapuna (skolidi goshañ) skolioù disheñvel, e-sell kenlabour pedagogel.

Pat Lau, arbennigour war an deskadurezh eus kuzul an deskadurezh, a verk pouez ar programm e-keñver kas sevenadur Hawaï war-raok.

"Ur programm a zo bet staliet, o kas kapuna ha makua (skolidi kozh pe goshozh) er skolioù all, en ur eskemm titour diwar-benn sevenadur ha yezh Hawaï". Rannet eo Honolulu etre distriktoù, pep a gapuna programm ganto, etre eskemm istor ha sevenadur, hag a buhezka he gounid o bro dre o yezh ■

Dont da vezañ skolaer e Diwan

An tutañ

bloavezh Niver a stajidi (skolaer, kelenner)	1990	1991	1992*	1993*	1994*
	10	15	12	13	13

*raktresoù diazezet diwar ar c'hresk-bloavezhiek : 25 % a vugale e Diwan

Skolaerien

Ur stummadur war daou vloaz

Evit en em ginnig : Diplomoù BAC + 3

Anaoudegezh eus ar brezhoneg (dre gomz ha dre skrid)

Diwar doser ha da c'houde, bodad goprañ (liveoù skol, testoù psikoteknikel, diviz...)

Bloavezh gantañ (gopr SMIC)

40 sizhunvezh stummadur a vo kinniget d'an danvez-skolaerien

-12 sizhunvezh : brezhoneg ha kelennadur war ar brezhoneg

-15 sizhunvezh : ar c'helenn teorikel

-15 sizhunvezh : ar c'helenn en un doare pleustrek

Arnodenn : tremen en eil bloavezh

Eil bloavezh (gopr : skuliad M.A.IV an deskadurezh Stad)

Labour : war bost, heuliet gant ar stummer, kuzulier, hañcher.

Titlador goude un arnodenn -hag- un diviz micherel

Kelennerien

Evit en em ginnig : live Bac +3

Anvidigezh war bost : er skolioù Diwan, diwar c'hoantoù pep hini, e stad-tiegezhel hag en ur derc'hel kont eus o gozhni.

Raktresoù micherel : al lodenn vrasañ eus postoù nevez da zont 'vo pourvezet dre an diabarzh (stummadur diabarzh Diwan) : kuzulier, stummer, diaforour danvez pedagogel...)

Skuliad ar goprtoù a zo stag ouzh hini an Deskadurezh Stad.

Diaesterioù adarre

P'emañ SEASKA, en Euskadi, da vat o kevraouiñ un emglev nevez gant Rector Bourdel, emañ atav Diwan o klask gant piv e vefe tu da gomz.

Skrivet ez eus bet ul lizher da Jack Lang gant Andre Lavanant. Daoust ma 'z eus bet klasket dibaoez komz gant ar Ministrerezh hag ar Rectoriezh abaoe miz Genver 1992, n'eus bet graet kinnig resis ebet da Zwan evit ar mare. Diarbennoù talvoudus, kemeret

hep gortoz pelloc'h, a c'hortoz Diwan digant ar Ministrerezh. Anez-se ne chomfe mui an disterañ kred er re a zo ar galvoud ganto, a skriv A. Lavanant. Dlouzh e du en deus ivez J.Y. Cozan grate goulennoù ouzh ar Prefed diwar-benn dazont ar skolioù brezhonek. E respont ar Prefed ne gaver nemet promesaoù, sañset dont da wir e miz Du ...

Maodez Kombod

Lise Diwan

Digoradur

er bloavezh-skol 93/94

Diwan en deus divizat digeriñ ul lise e 93/94. Anat eo d'an holl en deus an diviz-mañ ur pouez istorel evit dazont ar brezhoneg. Evit ar wech kentañ e vo kelennet en hor yezh betek live ar vachelouriezh. Met kalz a labour a vo da gas da benn, kalz dafar-kelenn, kalz dorn-levrioù a vo da sevel a-raok tizhout ar pal.

Entanet eo tud bodadoù-labour Eil-Derez Diwan avat gant ar bariadenn nevez-mañ, met spontet ivez un tamm gant ar samm-se o kouezhañ war o chouk. Frealzet e vefent o wlelet tud nevez o tont da sikour anezho. A-drasur ez eus e touez ar vrezhonegerien tud barrek hag un tamm amzer ha youl ganto, youl draist-holl, o defe plijadur ha loc'h da gemer perzh el labour pouezus-mañ.

Ul labour a-stroll eo hag hervez an danvezioù e vez labourer, pe oc'h eskemm lizhiri pe dre emvodoù. Al labour a zo da sevenañ a zo ivez hervez an danvezioù : treiñ diwar levrioù e galleg pe sevel kentelioù penn da benn (evit ar brezhoneg evel danvez da studial da skouer).

Marteze ez eus ivez unan bennak, dedennet gant an arzoù a c'hallfe prientiñ un dornlevr, pe ul levr zoken, war an arz e Breizh. Ar skouer diwezhañ-mañ a sikouez peged ledan eo an tachennoù a zo da blaustriñ warno.

Kement hini a zo dedennet, zoken ma ne vefe nemet evit treiñ ur gantel, a c'hall mont e dremperd gant :

Daniel Kernalegenn

Kenurzhier Bodadoù an E.D.

Lost al lenn

29510 LANDREVARZEG

pg : 98.57.36.98 (goude 6e noz)

**PRENIT DEIZIADUR
1993 DIWAN !
45 LUR AN TAMM
DIWAN BP 22
LANNILIZ**

Prizioù Langleiz ha Roparz Hemon

E Spezed, e ti Breizh (Coop ha Diffusion) a lide he 20 vloaz, eo bet roet prizioù Langleiz ha Roparz Hemon evit ar bloaz-mañ.

Priz Langleiz zo aet gant Erwan Evenou evit e romant "Nikolazig ar broioù tomm". Un oberenn a ra al liamm etre div vro, Aljeria ha Breizh, en deus bevet ar skrivagner enno "Unan eus ar gwellañ levrioù bet skrivet e Brezhoneg" hervez Per Denez, kadoriad ar bodad dibab.

Priz Roparz Hemon zo aet gant daou zen : Gérard Cornillet hag Ivona Martin. An hini kentañ evit e oberennoù vras : kelenn Brezhoneg, studiañ evit skolveur Roazhon, kenlabourat da sevel dafar evit eil derez Diwan... An eil evit he labour a ren abaoe pell evit ar Brezhoneg. Kenlabouret he doa Ivona Martin gant Roparz Hemon, Dreist-holl pa oa eñ en Iwerzhon. Hi eo a rae war-dro e labour e Breizh : bizskriñ, skignañ... Hi eo ivez he deus broudet Anjela Duval da skrivañ. Ur vaouez leun a startijenn eo, ur skouer evit ar re yaouank en hon bro.

Ur priz ouzhpenn zo bet roet d'an tri den dibabet gant Bank Broadel Breizh. Billhedoù Breizh eveljust, en o zouez unan gant skeudenn Roparz Hemon. Ar billhedoù-se a oa bet savet da gontañ Gouel Broadel ar Brezhoneg e 1991 ■



Erwan Evenou, oberour "Nikolazig ar broioù tomm"



Gérard Cornillet hag Ivona Martin

KARAEZ GOUEL AL LEVRIOÙ E BREIZH

Sadorn 6 ha Sul 7
a viz Du 1992

Embarnerien, oberourien, levrioù a-bep seurt, sonerezh, diskouezadegoù, setu ar pezh a vo kinniget deoc'h

Digoradur ofisiel
d'ar Sadorn da 11 eur

sinadurioù al levr
adalek 2e30

Fest noz vras
adalek 9 eur noz

gant AR RE YAOUANK
AR VREUDEUR MORVAN
Molard - La Corre - Simon
Guilou-Merchand-Venner-Louarn

D'ar Sul adalek 10 eur mintin
diskouezadegoù, gwerzhioù, diviz, sinadurioù, ha
desoc'hioù ar c'hennstivadegoù
graet er skolioù

Fest-noz

D'ar 7 a viz Du 1992 e Monterfil da 9e noz (Sal ar Bétangeais) aozet gant "KOPRAGANED MONTEFFIL". Gant ar strollad TRIDAL ha sonerien-kanerien KELCH Keltiek Roazhon.

Sadorn 21 a viz Du 92 adalek 9 eur noz e sal an EPI Karter Longchamp e Roazhon.

Fest noz aozet gant Kelc'h Gallo Roazhon. Klevet vo sonerien ha kanerien KGB hag ar strollad DAOUARN

Rock ha Breizh

Fulor, un emsavr re yaouank e Breizh a'n em led tamm ha tamm dre ar vro. Kevrennoù zo e Naoned, Roazhon, Bro Dreger, An Alre... Kas a ra war-raok oberoù zo a c'hell bodañ tud yaouank, evel ar sonadeg "Rock enep ar beton" en Alre e miz Here. Fulor a ziskler bezañ "enep faskour, broadelour, enep kapitalour, enep urzh, enep gouennelour, enep reizhelour hag enep arme".

Ermañ HOR YEZH o paouez embann un nebeud levrioù a vo degemeret mat gant hol lennerien. Setu amañ da heul un diverradur eus raklavarioù an 3 Levri Kaset da Vremañ.

Marvailhoù ar Vengleuz

"Marvailhoù ar Vengleuz" gant Dik Trevan. 19 danevell o skeudennit buhez kalet ar vengleuzerien sklent e Kembre e penn kentañ ar c'hantved-mañ. Troet int bet war-seun diwar ar c'hembraeg gant Aboezen. Skeudennoù. 164 fajenn, ment 21*14,8, golo liv, 85,00FF an tamm

"Marteza" e teulo Dik Trevan da vezañ brudetoc'h ar vro-mañ eget e Kembre 'lec'h n'eo ket gwall anavezet. Ha kement-se a-drugarek da "vadelezh ur gward, dezhañ un tamm kalon-den e e greiz" a roas an aotre da Fañch Elias da virout en e gerz Storiou Richard Hughes Williams, ul levr hag a oa bet tennet digantañ gant ur gward all pa oa erruet e toull-bac'h Jakez Karter, e Roazhon, d'ar Yaou 21 a viz Gwengolo 1944 (...). Un dra a zo e bed teñval ar mengleuzerien, hag a zo evel ur banne klirijenn : ar bri a zouger d'ar spered, an doujañs a zo evit ar varzhed hag ar c'hezegourien, ar c'hoant a zo gant lod izont da vezañ en eil pe egile, ar youl a ziskoueza da zastum deskadurezh, ha pa ne vefe nemet e Skol ar Sul, ar poull da zastum barregezh da boellata, da zivizout, da arguzenniñ, da vredenñ, ha pa vefe diwar-benn ar Bibl, da gantañ-holl. Evel-se eo bet ganet ar rummad mengleuzerien (ha labourerien-douar desket o deus kaset war-raok ar sevenadur kembraek, koulz hag uhelvennadoù politikel n'int ket bet stalv, siwazh, lakaet e servij o fobl hag o bro".

Per Denez - Gwendal Denez

Danevelloù iwerzhonek

"Danevelloù iwerzhonek" gant Roparz Hemon. Adkavit henvoioù iwerzhon gant o harozed varzhuz : Diarmaid, Grainne, hag ar re all, lakaet e brezhoneg gant Roparz Hemon en un doare plijus da lenn (110 pajenn, ment 21*14,8, Golo liv, 65,00 FF an tamm). "An Dastumadenn-mañ a roan da embann evit lakaat tud all da gaoz, do zro, kement a biljadur ha ma'n eus-me bet hanter-kant vloaz zo - o lenn istor karantez Freaeh ha Findabair ha hini Liadain ha Curithir. Morse n'eo bet disoñfet ganin al levezon-se : gant an div zanevell-mañ en deus gouezet Roparz Hemon ober koulz labour ha Thomas Kinsella gant an Tain.

Displeget en deus Roparz Hemon meur a wech, ha da gentañ-holl en Ur Breizhad oc'h adkavout Breizh, er pennad "Al lennegezh keltiek kozh ha n'eo perak e oa talvoudus, ha pouezus, lakaat e brezhoneg, evit an holl, ha n'eo ket evit ar ouizieien hepken, teñforioù al lennegezh keltiek kozh. Daou zen dreist-holl o deus labourat war an dachenn-se : Fañch Elias-Aboezen, evit ar c'hembraeg-krenn, ha Roparz Hemon evit an iwerzhoneg. Diouzh e du, hag un tamm diwezhatoc'h, e reas G.B. Kerverhiou, hag un nebeud mignonned dezhañ, troidigezhioù all : Kad Mag Tured, da skouer. Diwar an destenn-orin e voe graet an troidigezhioù-se hag o fal, a-wechoù evit abegoù a gredenn, a oa bezañ resis ha skiantel muioc'h eget bezañ aes ha dedennus da lenn.

Ouzhpenn an div zanevell hag o deus plijet din kement pa'z int bet embannet e 1941 ha 1942, em eus soñjet e oa mat lakaat an troidigezhioù-mañ : Diarmaid ha Grainne, An emval goude ar marv, Gwedelegezh Mab Conglin, Conla Blev Malen hag ar Gorriganaz, Liadain ha Curithir, ha Karantez Freaeh ha Findabair...".
-Raklavar gant Per Denez - Embannadurioù HOR YEZH 1, plasenn Charles Peguy 29260 Lesneven.

Danevelloù kozh danvez Breizh

"Danevelloù kozh danvez Breizh" gant Roparz Hemon. Aet eo da glask ar bruzunioù-se e galleg hag e saozneg hag o distroet en deus e brezhoneg. Plijus e vo d'al lenner mont da heul Arzhur ha marc'heien an Daol-Grenn er yezh a oa o hini : ar brezhoneg. "Unan eus menzioù Roparz Hemon a zo bet reiñ en-dro d'ar Vretoned o lennegezh kollet : gant an distrujadegoù sevenadur deud a-vern da heul drouzidivezh Breizh diabat, gant dismantradeg al lec'hioù ma oa mirat enno levrioù, dihalloù, domskridoù - ar manatioù hag ar c'hastilioù - da heul trec'h ar jakobined vroadelourien c'hall, gant an dispiz maget e spered ar Vretoned evit o sevenadur-gwellit ar pezh a gont Erwan Vertou diwar-benn implij al levrioù kozh d'ober tan dindan ar billig-krampeuzh - n'eo ket souezh e vije deuit Breizh da vezañ un daore gouelek a-fed lennegezh skrivet, kozh pe damgozh : gwashoc'h c'hoazh zoken eo bet an distruj sevenadur e Breizh eget en Iwerzhon pe e Kembre, hag o deus bet koulskoude o lodenn vat a reuz. Aet hol lennegezh kozh gant an tan, al lodoc, argleober pe ar valerezh paper. E yezhoù all avat e c'heller

kavout, aet e piau hon amezeien, aspadennioù pe addisplegadurioù anezhi : e galleg-krenn, e saozneg-krenn, e latin ar grennamer ; furchal a ranked en italianeg, katalaneg, norseg, portugaleg, e meur a yezh all c'hoazh. E-barzh Al Liamm -gwellit ar pennad moulet "e-giz raskrid"- e dispjeg Roparz Hemon e c'heller adperc'hennañ al lodenn-se eus hon hêrezh vroadel, ha pegen pouezus eo hen ober : gantañ e teu zoken ur roll eus ar skridoù a ziele bezañ lakaet e brezhoneg. Ha peogwir "pap rat em spered bevus a dro da ober" (P'ic'hinn ar Mer) en deus staget Roparz Hemon da lakaat e brezhoneg lod eus ar skridoù-se ; ha staget ganti kan abred ha 1926, pa'z eo bet embannet e Gwalarn, niv. 6 ha 7, Danevell ar Franklin (...)."

Par Denez
(164 fajenn, ment 21*14,8, golo liv, 80,00FF an tamm)

Gouel ar skolioù kristen

Ermañ ar skolioù kristen Penn-ar-Bed o vont da aozañ ur "gouel ar brezhoneg ha sevenadur Breizh en deskadurezh prevez" e Kastellin a-benn miz Ebrel 93.

Tri bloaz goude ma voe sinet un emglev etre Departamant Penn-ar-Bed ha Pennerezh ar Skolioù Kristen en departamant-se evit kas war-raok kelenn ar brezhoneg ha sevenadur ar vro e oa da veat ar poent da sellet a-dostoc'h ouz stad an traoù. Hervez renerien an deskadurezh katolik eo gwellaet kalz ar c'helienn brezhoneg en o skolioù, en ur ober tri bloaz, a-drugarez da sikour arc'hant ar C'huzul Meur (1,8 milion a fr. lioù). Hiziv-ez eus, e skolioù kristen Penn-ar-Bed, pemp klas divyezhek brezhoneg-galleg er c'hentañ derez, ha triwech skolañ (diwar 50) a ginnig Kenteñhoù Brezhoneg. Kreskiñ a ra niver ar skolidi er c'hlasoù-se eus 25 % bep bloaz. Setu m'emañ e soñt an DDEC (Pennerezh ar Skolioù Katolik evit an Eskopti) hag ar C'huzul Meur reiñ un astenn d'o stummañ skolaerien ha kelennerien a vo reiñ talañ outi ivez, evit galcuit delec'har da zigeriñ klasoù divyezhek. D'ar sul 18 a viz Ebrel 1993 e vo aozet gant ar skolioù kristen ur gouel bras e Kastellin, anvet "Lavarat Breizh", ma vo tu d'ar skolidi ha d'ar gelennerien en em gavout a-gevret.

IK


Skrivañ da AL LIAMM
16 straed des Fours à Chaux
35400 - SANT MALO -

Lennit al liamm

Koumanant bloaz 150 lur (studieren, tud dilabour 100 lur)

Gouel Ar C'hoariva

D'ar gwener 13 ha d'ar sadorn 14 a viz Du e vo dalc'het Gouel ar C'hoariva e sal ar Stella e Lambezelle (Brest).



Teatr Penn ar Bed : "Benn arc'hoazh e vo diez c'hoazh"

Daou bezh c'hoari nevez a vo kinniget :
D'ar Gwener 13 a viz Du da 8e 30 "Benn warc'hoazh e vo diez c'hoazh", ur pezh bet savet gant Gwilhou Kergourlay, leurennet gant Bernard Lotti ha c'hoariet gant Teatr Brezhoneg Penn ar Bed.

D'ar Sadorn 14 a viz Du da 8e 30 "An arar hag ar stered", ur pezh-c'hoari bet skrivet gant Sean O'Casey hag a vo c'hoariet gant Strollad Ar Vro Bagan. Ar gouel a zo aozet gant Sked, ar gevredigezh hag a vod ar strolladoù breizhek eus Brest ha diwar-dro. (sellet Bremañ niv.133)

SKED - 9, straed Bois d'Amour - 29200 BREST - 98.80.26.71.

Stajoù

Dibenn-sizhun Brezhoneg e Rostren d'an 21-22 a viz Du 1992

Kinniget gant : A.P.E.E.B Rostren ha G.A.E.L. Rostren, aozet gant Stumdi Lec'h : Graet e vo ar c'hentelioù e ti "Culture et Promotion" 23 Straed Marcel Sanguy -Rostren
Live : Meur a live a vo.

Preoù : Bez e c'hello ar stajidi debrñ ha kousket

Eurioù : 9e - 12e15 14e - 17e15

Priz : 250 lur (hep bod na boued)

Titour : Stumdi -Mesmerc'hoù- 29870 Lanniliz Pgz. 98.04.08.31 pe Gronvel 98.24.25.09.

Kentelioù Brezhoneg e Becherel (35) pep Yaou :

Evit ar Vugale : eus 18e betek 19e.

al live I : eus 19e15 betek 20e30.

al live II : eus 20e45 betek 22e.

Savenn Douar : 99.66.73.43.

Dibenn-sizhun studi e Kastell La Briantais (Sant-Malo) d'ar Sadorn 21 adalek 2eur betek ar Sul 22 da 6e abardaez. Digor eo ar staj-mañ d'an holl liveoù (5 live a vez kinniget d'ar stajidi -deraouidi d'al live aotreegezh vrezhonek). Graet vo war-dro bugale ar stajidi gant animatourien "Dudi" e-pad ar c'hentelioù. Nozvezh laouen a vo diouzh ar sadorn noz.

Titour hag enskrivadur : SAE 8,straed Hoche 35000 Roazhon 99.38.75.83. (a-raok ar 15 a viz Du).

Priz : 400 lur (kentelioù - bod - boued), 250 lur evit an dud dic'hopr, studierien, liseidi.

Kentelioù-noz St Nazer (44)

Kentelioù Brezhoneg bep meurzh da 8e30 e Skol Waldeck-Rousseau e Herbins (S. Nazer) ; (war-dro 50 den a vez o heuliañ ar c'hentelioù-se rannet etre 3 live.) Pg : 40.61.97.02.

TAOLENN

BREMAÑ niv. 134
miz Du 1992

Lizhiri	2
Karta Kuzul Europa	3
Ekonomiezh	4
Politikerezh	5
Etrebroadel	6-7-8-9
Kevredigezh	10-11
Religion	12
Istor	13
Yec'hed	14
Kevredigezhioù	15
Deskadurezh	16-17
Lennegezh	18
Levrioù nevez	19
Gouelioù	20

Maketenn gant Lena Louarn ha J.M. Roynard.

Skoazell gant Kristell Louarn, Nadine Quetier, Dominig Gratiet.

Labour difaziañ gant Olier ar Mogn.

Pennadoù gant I. Kadored, Hegareg, Gw. C., SAB, Gw. E., Herve Kerrain, M.K., Yann Fañch Kerneis, Robert Baxter, Fulup Oillo, Paol ar Meur, Pascal Tabuteau, Maodez Kombod.

Luc'hskeudennoù gant O.F., Pour la Science, Y.F. Kerneis, Dominig Jolivet, Lena Louarn, Paol ar Meur, Klaod an Duigou.

Tresadenn gant Cabanes.

Renerez BREMAÑ : Lena Louarn

Skrivet e-barzh BREMAÑ ! Kasit ho pennadoù, gant skeudennoù, dreist holl ! war baper, pe gwelloc'h pladennig a-raok an 20 a viz Du ! Trugarez deoc'h.

Ar pennadoù ne engouestlont nemet ar re a sin anezho. An orinoù ne vezont ket restaolet.

Koumanant : 180 lur ar bloaz, skoazell : adalek 200 lur ar bloaz.

BREMAÑ,
8 ru Hoche,
35000 Roazhon, BREIZH.

Niverenn CPPAP 62974